

## CANTIK

## EN HENOR SANT PER

TON : Sellit ~~pl~~<sup>our</sup> an taolennou.

## DISCAN :

Saludomp Prins an Ebestel,  
Ha d'hen pedi bezomp fidel.  
Euz a Sant Pêr ar servicher  
A vo tennet a bep danger.

Sant Pêr a lêz he vag, he dad  
Evit heuilla he vestr ker mad.  
Embann a ra dirac an oll  
Jesus Salver euz ar bed oll.

Jesus var Bêr 'sav he Ilis,  
Euz an ifern 'kuez ar valis.  
Satan da Bêr a ra brezel  
Eb trec'hi an diskibl fidel.

Ganthan lezen ar garante,  
Prezec a ra guir Vab Doue.  
Dre ma tremen, burzudou bras  
D'ar bobl 'ziscuez vertuz ar groas.

E Rom, neuze kear an errol,  
E c'hantre gant he vreur Sant Paul.  
Eno, dre ners ho fedennou  
E tiscaront an idolou.

Simon a glask gant he ardou  
Skigna dre Rom fals credennou.  
Mès scoet gant an Ebestel,  
Ar pec'her-se a renk mervel.

Neron, d'an oll vissou roet,  
A lavar : Me 'vezo venjet.  
Buez Sant Pêr d'in-me 'vezo  
Ha Paul ive me a lazo.

Neuze Neron a gondaonas  
Sant Pêr da vervel var ar groas ;  
Mès Paul da veza dibennet  
Gant an tirant 'voa condaonet.

Meulomp Sant Pêr, vikel Jesus,  
Hac hor Patron carantezus ;  
Dezhan bepret honor ha gloar  
En envou ha var an douar.

Sant Pêr, bennigit en deis-mâ  
Ho pugale stouet amâ.  
Mirit ar feis en hon touez,  
Ennhi e-mâ ar guir vuez.

Imprimatur :

Corisopiti die 3 Novembris 1879.

† D. ANSELME,

O. S. B.

Ep. Corisop. et Leonensis.